

Hent ar C’huzh-heol

Embannet evit ar wech kentañ e niverenn

454 Al Liamm, Gwengolo-Here 2022

A-boan treuzet karter tourioù uhel an Défense ha kuitaet broig an arc’hant bras ez antreer e kontreoù all, damestren, tachennoù kemmesk ma c’hello souezhañ, koll sont pe zoken spontañ kantreerien dianket zo. Ranngerioù pe bannlevioù ma kaver c’hoazh, e lec’h-mañ-lec’h, PMU, kigerezh ha ti-forn ar Frañs beurbadel, kalz rouesoc’h avat eget ar stalioù falafel, kebab, tandoori pe chicha ; lec’hioù ma tregerno, a-us da vouboù ar metropol divent tro-war-dro, halpadenn ar rap, sklint rumba Kongo pe galv ar muezzin diouzh ur voskeenn nevez savet, paotred barvek dic’hoarzh en-dro dezhi. Straedoù ma kejer enno gant merc’hed burkaet penn-kil-ha-troad pe maouezed afrikan fetis o vont d’an inkane en o dilhad liesliv, un torkad ribitailhoù d’o heul...

Amañ hag ahont e weler stalioù bet serret – pell zo, diouzh o gwelet –, faout o gwerinier poultrennek, reoù

all nevez digoret, saloñsoù-kened afrikan, lochennoù strizh, staligoù boued, berr o buhez, Anadolu Kebab, Asia Wok pe Fast Halal. Lec'hioù ma kaver skritelloù peg ouzh gwerinier-dal ar 8 à 8 pe *Carrefour Market* e korn ur skwar kras ar geot ennañ, embannet warno servijoù tud gouest da bareañ kement poan korf pe spered pe da zistanañ ar c'hoant mont.

En endervezh deroù-hañv-mañ avat, gant an diouer a lañs hag a drouz hag a liv e kêr, e c'hello chom war o naon ar re tik war ar filmoù *gangsta* amerikan. Toull ar vizer du n'eo ket, na porzh ar burzhudoù, na baradoz an dorfedourien. Kentoc'h e santer ur faezidigezh o plavañ, o pouezañ war an dud hag an trowardroioù betonnet tomm-berv, an aked a lak an holl da virout a groazañ selloù ar re all. Ur santad iskis e c'hellfe an traoù tumpañ eus an eil penn d'egile, eus an eil munutenn d'eben. Skuizhder hag aon mut ha mouget ur bed tonket da vont da get, da-heul an tourioù lorc'hus a weler alese o lugerniñ kerkent ha savet e selloù... Total, Engie, Allianz...

Ur santad a c'hell bezañ anavezet gant an dud bet ganet ha maget en teroueroù dilorc'h-se ivez ; tud eveldon.

O vont d'ar gêr e oan pa oa chomet a-sav ur c'harr a-daol-trumm em c'hichen. Ha me gourlamm, ha dined'het o welet e oa Kim, va c'hamarad hag amezeg. Diskenn a ra gwer ar prenestr ha chuchumuchañ din :

— Kenan, puten, o klask war da lerc'h emañ, abaoe ar mintin-mañ. Dav dit skarzhañ kuit ac'hann. Diouzhtu !

— Met petra, pet...

— Mehdi zo war da lerc'h ; ha n'eo ket tout : ar flied ivez. War am eus klevet out bet filmet ganto dec'h...

Dec'h da noz... me o vont d'an toull-kuzh... daou lur ganja e godelloù va forpant... mont dre ar vanell didud da serr-noz, ha sellet a-gleiz hag a-zehoù, war-dreñv... ha prim e-barzh an ti displeber, ha pignat betek al lojeiz dibrenn en estaj kentañ. Evel boas... Hag en em silañ er-maez diouzhtu war-lerc'h, ken aketus all...

— Laosket out bet da vont gant ar re-se, ken a zeufe ur penn brasoc'h da zastum an drogaj. Lâret zo bet din e oa bet tapet Said ganto, ha Mehdi a soñj dezhañ eo ganez int bet flatret d'ar re c'hlas.

Gast... Chom a ran sabatuet war ar riblenn-straed en heol didruez. Ha me o vont da welet Mehdi, dres... da gaout va gwenneien.

Petra ober ? Petra eo ar gwashañ ? Kouezhañ etre krabanoù beg-e-dok pe re Mehdi ? N'on ket bet test eus tra, met trawalc'h 'm eus bet tro da glevet abaoe ar c'hwec'h miz m'emaon en e servij... Arabat klask c'hoari gant paotred eveltañ... kablus pe digablus, ne 'z aio ket da glask pemp troad d'ar maout, ne cheñcho ket kalz a dra evidon.

Pellaat, skarzhañ kuit, tec'hout, diflipañ... n'eus netra all d'ober.

— Kae kuit, hep termal, hag arabat ober gant da hezoug ken. Ale, chañs vat dit, ha 'peus ket gwelet ac'hanon, hañ, emezañ en ur astenn daou vilhed ugent euro din. Del, setu tout ar pezh zo ganin.

Hag eñ kuit gant ruoc'h keflusker c'hwezhet e Golf.

Ur sell ouzh an hezoug. 14 eur 03. Emgav a-benn teir eur. Ma ne vije ket bet Kim war va hent...

Seizet on gant an aon. Gleb-teil eo va roched gant ar c'hwezenn. Petra ober ? Mont war-zu kêr a rankan ober,

mont diwar-wel, e-touesk an dud, kemer metro, bus pe tren, ne vern, buan-buan, pell alese !

Evit mont da belec'h, se ?

Ar vamm...

Erru on e-kichen arsav ar busoù.

Ar vamm... bloaz hanter zo 'm eus ket gwelet anezhi. Abaoe ar *bac* c'hwitet ganin, ar vuhez diroll war-lerc'h, hag ar c'hoari mevel bihan evit Mehdi da c'houde.

Ar vamm, ya... piv all ? E Gennevilliers emañ o chom. Gant he gwaz nevez... Régis, ar bleiner kirri-samm. Emichañs e vo hennezh war hentoù Frañs pe Europa er poent-mañ, rak livastred eus va seurt n'int ket diouzh e c'hrad.

Tennañ a ran va hezoug eus va godell, dibab he niverenn ha gervel, a-raok lazhañ trumm ar pellgomzer. Hopala, petra 'maout oc'h ober aze ? Dre ar re-se e vez *tracket* an dud, eveshaet kement fiñvadenn, mabkas inosant sot, petra 'n deus lâret Kim damaik ? Dav en em zizober deus hennezh. Ya, tennañ ar gartenn SIM dioutañ da gentañ, ha zilh ! 'barzh ur boubellenn, e-touesk ar c'hanedigoù hag ar pakadurioù boued.

Ha va c'hartenn-bank ? War-bouez an daou-ugent euro roet din damaik gant Kim n'eus nemet pezhioù bihan em godell, hag ur bilhed dek. Tañpir... dav 'vo din avanturiñ. Ur bilhedaouer zo e-kichen. Ur sell ouzh va c'hont... 187,36 euro... Ha dao, nav-ugent a duf ar mekanik din, ha va c'hartenn freget da vont er bailhlastez, da-heul an hezoug.

En em soñjal un tammig bremañ... Ar 178, ya, soñj a deu din. Hennezh a gaso achanon betek ti ar vamm pe damdost.

Rouez an dud en-dro d'an arsav. Krenañ a ran ; ne baouezan ket da sellet war-dreñv. Spontus pegen kreñv e talm va c'halon. Deus, deus 'ta neuze, bus brein !

E tu all an hent e welan daou archer o tont davedomp. Sonnañ a ran. Foutu on, echu an abadenn, skignet eo bet va foltred dija en holl gomiserdioù moarvat. Ma, gwelloc'h c'hoazh marteze mont d'an toull eget bezañ paket gant Mehdi... Tremen a reont hebiou avat, ha mont pelloc'h gant o hent hep sellet ouzhin.

Ur sell ouzh va montr : tost teir eur eo. Poent va emgav ganto. A-benn ur pennadig e vint holl war va lerc'h, ma n'int ket loc'het c'hoazh...

Poent din chom a-sav gant ar business-se. Re fromidik on-me, n'on ket evel Karim pe Dylan, paotred kalet anezho, disaouzan ouzh ar bac'hadoù pa vez ret. Ar re-se a oar derc'hel war o nervennoù. M'on bet dibabet gant Mehdi eo abalamour da'm doare paotrig fur, da'm dremm c'hall ha da'm blev melen, da'm galleg disi. Un den da dremen diheverzh e kement lec'h zo.

Mehdi... Sklasañ a ra ar gwad em gwazied...

A-bell 'm eus gwelet ar bus o tont – na pegen difonn –, ha chom a-sav, ha tud da ziskenn diwarnañ – na pegen gorrek –, hag e-barzh, hag en hent.

Dre ma pellaomp diouzh an tourioù uhel e treuzomp ardremez mesk-divesk ar bannlev, tourioù e-kichen sava-durioù kranoc'h hag izeloc'h, sanailhoù ha magazennoù, takadoù glaster amañ hag ahont. Karterioù o vont war jentilaat, reoù all war zisleberaat...

Na pegen hir an hent... Arsavioù forzh pegement, tud o pignat hag o tiskenn. Ur sell bep taol... daoust ha ne

vefe ket hennezh, ar paotr tev mourroù dezhañ, ouzh ar prenestr, unan eus mevelien Mehdi...

A-benn an arsav kentañ e rankan diskenn. Arabat pennfolliñ, ne oar hini ebet anezho e pelec'h emañ va mamm o chom... na zoken e vefe eus va vamm...

Ur straed hir tiez uhel a bep tu dezhi. Treiñ a ran a-zehoù a-raok en em gavout en eur c'harter mesket, pavilhonoù bihan hag HLMoù pevar estaj propik o neuz. E unan anezho emañ ar vamm o chom. Ur sell tro-dro adarre...

Meynier Régis & Izza. Trede estaj... Pouezañ a ran war ar sonetez :

— Ya...

— Kenan eo, digor din mar plij...

Trouz hec'h alan en nec'h...

— Deus pelec'h emhout o tont ?

— Digor din mar plij, mamm. Kontet vo dit damaik.



E saloñs bihan mamm emaomp, oc'h evañ ur banne kafe goude an tamm gortozenn fardet ganti. Sot n'eo ket ar vamm, ha komprenet buan he deus e peseurt toull-sac'h eo kouezhet he mab. Seblantout a ra din gwelet rodajoù hec'h emprenn o vont en-dro endra m'emañ o treiñ gant he loa vihan en tas. Ur vaouez poellek eo, ar vamm, ur vuhez start eo bet hec'h hini, ha n'eo ket ar wech kentañ dezhi rankout talañ ouzh skoilhoù dic'hortoz ha kemer divizoù war ar prim.

Kinklet puilh eo ar saloñs gant traoù a bep seurt, herezh daou gultur : ouzh ar voger un dourlivadur eus porzh Bejaia, ur foto brasaet eus ar vamm ha Régis war-

lein ur menez-tan e Arvern, bro va leztad... doubieroùigoù brodet un tamm e pep lec'h, war ar ganastell un toullad fotoioù.

Sevel a ran ha tostaat. Chom a ran sebezet dirak poltred daou zen yaouank kenedus, ur plac'hig etrezo. Ar wech kentañ eo din gwelet hennezh.

Kazel-ha-kazel emañ an daou zen yaouank, un duardez krenn he ment gwisket gant ur sae-hañv, solut he framm, mistr he divesker, lemm he sell ha splann he mousc'hoarzh, en he c'hichen ur paotr melen e vlev, moanoc'h ha bihanoc'h egeti, warnañ bragoù flannell ha roched wenn berr he milginoù, ken mousc'hoarzhus all, habask hag hegarat e neuz. Plezhennet ha ken du ha blev ar vaouez eo re ar baotrez lentik etrezo. Ur gaer a blac'hig, un eizh vloaz bennak dezhi. Ur poltred bet tapet en hañv, anat, en ur parkêr moarvat, diouzh an tourioù uhel a weler en diadrefñ. Ar santad a beoc'h hag a eürusted o tont eus skeudenn an tri den-se a lak an daeloù da zont d'am daoulagad.

Ar vamm a dosta ouzhin ha lakaat he brec'h war va skoaz :

— Va mamm an hini eo aze, er c'hreiz, ha va zud-kozh en daou du dezhi... Annaig ar Vretonnez ha Mouloud ar Berber. Nag ur c'houblad, hañ, hag an Nelya vihan koantik, etre an daou !

Sellet a ran a-dostoc'h. Souezhus penaos e tennan d'an den : bihan va ment, melen ha rodellek va blev, tanav va dremm...

— Ya, evel pa vijes-te war ar foto ! Ur paotr koant, n'eo ket 'ta ? Ha sell mat outo : poltred ar gwir levez ! Ma, met al levez ne bad ket da viken, te 'oar, emezi, c'hwerv he mouezh.

Trumm e tro davedon :

— Met, nondegast, 'm boa ket soñjet en dra-se : honnezh zo bev atav, ken buan all ! Ouzhpenn dek vloaz zo 'm eus ket bet keloù anezhi... Soñj' a ra din emañ he chomlec'h ganin, un tu bennak... gortoz !

Furchal a ra en un diretenn, ha mont d'he c'hambreda c'houde, ha dont en-dro, ganti un tamm bilhed ur chomlec'h skrivet warnañ : Annaig Plassart, Gwern ar C'haro, 29 Sant-Armel. Niverenn bellgomz ebet.

— Un tamm toull kollet, e kreiz departamant Penn-ar-Bed. N'ouzon dare petra 'gavi du-hont, met kenkoulz dit mont di, ha petra ober a-hend-all ? Amañ n'helli ket chom avat, risklus e vefe, hag ouzhpenn-se e vo Régis er gêr emberr.

— Gwir, Régis...

— Sell, e-giz-se 'vo graet. En traoñ emañ va Ford Fiesta kozh. Ouzhpenn bloaz zo 'm eus ket implijet anezhi. 'M eus ket ezhomm anezhi forzh penaos, abaoe ma labouran e-kichen. Ur sell a ra ouzh he Montr. Justamant, dav 'vo ober buan, rak da bemp eur e rankan bezañ er stal.

Hag hi furchal er pres hag er yenez ha fourrañ tammoù boued ha div voutailhad dour en ur sac'h, ha tennañ arc'hant eus ur voest amailhet :

— Del, setu emañ tri c'hant euro lakaet a-gostez ganin, e ken kaz. Ha ya, chomet zo un nebeud pezhioù dilhad dit, emezi en ur zont en-dro eus ar gambr gant ur sac'had anezho. Deomp bremañ ! 'Mechañs e vo moaien da loc'hañ an oto !

Ur renkennad garajoù bihan hollheñvel a zo en alez a-dreñv ar savadur. Aze emañ, ar Fordig poultrennek. Ur sell er c'hombod manegoù, paperioù an oto hag ur

gartenn Frañs ennañ. Gant ar vamm e sellomp pizh outi : anat eo, ret e vo din chom hep mont dre ar gourhentoù, gant o feajoù hag o c'hameraioù, ma vez diaesoc'h-diaes ouzhpenn paeñ gant arc'hant laosk.

Alc'hwez e-barzh... sklêrijennañ a ra an daolenn-stur : n'eo ket aet ar batiri da get ! Ha tri-c'hard leun eo ar veol, setu ne vo ket ret din magañ anezhi a-raok bezañ graet un tennad mat, peadra neuze da dizhout penn va hent. Goude un nebeud taolioù-esae e loc'h ar c'heflusker. Savetaet !

— Kae bremañ, ha chañs vat dit, va mab, emezi en ur flourañ va jod. Ha kas keloù, pa c'helli. Ha, del, kemer an dra-mañ, da gas kuit an droukchañs, hag hi tennañ ar groaz Agadez a oa a-istribilh ouzh he gouzoug ha lakaat anezhi en-dro da'm hini.

— Kenavo, mamm, ha mil drugarez dit, emezon, pinous, ha briata anezhi en ur zifronkañ.

Ger ebet eus ar fed ez eo chomet pemzek miz hep kaout keloù eus he mabig, eus he lellig troet da fall. Menegiñ a ra – war un ton yen a-walc'h – va c'hoar henañ Nora, a zo o chom gant he gwaz dantour nepell ac'hann. Tamm sikour ebet da c'hortoz eus an tu-se, sklaer eo din.

Va mamm, un hoalus a vaouez, stumm kaer d'he c'horf c'hoazh, a soñjan, skuizh ha dilufr he dremm avat, kuchennoùigoù gwenn-louet e-touez he blev stank du-bran. Sofia Loren 'veze graet anezhi gwechall en hor c'harter gant ar re goshoc'h... Izza kalet he flanedenn, kuitaet ar skol re abred ha kavet gwallbaotred war he hent... va zad en o zouez... Izza, kouezhet kant gwech hag adsavet bep taol.

Kuitaat an A86 a-raok peaj Rueil-Malmaison, he deus lavaret, ha mont dre kêrioù bourc'his ar bannlev, Chatou,

Le Vésinet, Saint-Germain-en-Laye, evit en em gavet en tu all da Versailles, war hent Dreux, ha kenderc'hel evel-se war-zu ar c'huzh-heol...

Sellet a ran ouzh he zrolinenn o tanavaat er melezour diabarzh, ha treiñ a ran a-gleiz etrezek ar straed vras, tenn va nervennoù ha bihan va c'halon. Etrezek ar C'hornôg, war hent ar Frankiz.



War roueshaat ez a red-dired ar c'hirri ur wech erru en tu all d'ar bannlevioù kornôg. Kregiñ a ra an heol da ziskenn dija war plaenenoù diazad Pariz. Din da vukañ war-zu ar c'helc'h alaouret neuze, betek fin. Betek ar c'hontreoù-se, dianav-krenn din, ma rankin stagañ gant ur vuhez nevez...

Bleinañ kirri 'm boa ket graet abaoe c'hwec'h miz met n'on ket bet re bell oc'h en em ober ouzh an tremeniri. Bremañ n'eus ken 'met heuliañ ruban glas an hent bras ha mirout a vont en tu all d'an harz-tizh ; n'eo ket ar poent bezañ paket gant ar flied. Alies e sellan war va c'hiz, ankeniet. Hopala, arabat morediñ, tost eo bet din tosañ penn a-dreñv ur garavanenn hag a ruilhe goustadik dirazon. Stignet-tout eo va nervennoù, skuizh-dall on. Poent eo din chom a-sav un tu bennak, ha buan, mod all ne erruin biken e Breizh.

Houdan, 12 km. Kavout ur porzh-servij du-hont, evañ ur banne kafe, digropañ, aveliñ va fenn un disterañ, distanañ... Ha leuniañ ar veol, kement hag ober. Kement-se a zlefe kas ac'hanon betek penn.

Arababaz fiziañ... Petra lakaat e-barzh, dija ? Soñj a deu